




# CANTIC SPIRITUEL

*En enor an Itron Santes Anna ar Palud, eur  
Plaç santel a so en escoply Querne e parres  
Plonevez-Porsay, a dost d'ar mor.*



**Var ton :** *Santes Mari, Mam Doue.*

**Me ho ped, Tad Eternel, crouer ar firmamant,  
Roit d'am speret sclerijen, Doue oll-buissant,  
Da disoloï eun tensor a zo e Breiz-Izel,  
Etouez ar Vretonet leun a graçou santel.**

**Gueres** glorius Vari, me ho ped, ma sicouret,  
C'hui, Itron Santes Anna, so enni enoret,  
Evit discleria d'an oll ho craçou excellent,  
Hac ar miraclou a ret, Rozen ar firmamant.

En' escopti a Guerne e bordie ar mor glas,  
E parres Plonevez-Porzay eus eur sourcen a c'hraç,  
Eur plaç leun a viraclou, mar deus var an douar,  
Batisset en eur blenen dirac an heol pa bar.

Cals eus a blaçou santel a veler batisset  
D'an Itron Santes Anna, e peb lec'h enoret,  
Balamour ma ra bemdez nombr bras a viraclou,  
Hac er mor hac en douar e cleo hor pedennou.

Mæs hep choqui nep chapel so dezi batisset,  
E deus eur plaç santel er Palud biniguet,  
Eleac'h-ma zeo enoret guir vam-goz hor Salver,  
Gant an oll belerinet demeus a bep cartier.

Ar plaç-man so frecantet gant guir devotion  
Gant ar gristenien fidel demeus a bep canton,  
Abalamour ma e deus roet cals a soulajamant,  
Ha ma obten ar yec'het da gals tud languissant.

Pobl a escopty Querne, c'hui a so eurus  
Da gaout en ho touez guir vam-goz da Jesus;  
Deut oll da c'houlen outi ar c'hraçou necesser,  
A galon vad d'e fedi d'ho tivoall dioc'h danjer.

O Itron Santes Anna ! bremâ ma sicouret,  
Pedit ho merc'h ar Verc'hes da rei din ar speret  
Ma c'hallin dre ho sicour coms eus ho miraclou,  
Hac eus an oll joausdet a laquet en hor bro.

C'hui oc'h eus plantet ar ros elec'h ma voa ar spern,  
Ha gret hent ar barados eus an hent an ifern;  
C'hui oc'h eus bet distroet pec'herien caledet,  
Hac o laquet da veza tud santel ha parfet.

**He** ho suppli, tud devot, chelaouet a vream  
Coms demens ar miraclou a ra Santes Anna,  
Ma teuffot oll a galon d'ar Palud d'e guelet,  
Ha ne goll quet ho poan dre graç Salver ar bed.

Eus ar parres Plougastel voa eur bælec yaouanc  
Privet eus ar guelet, en devoa nec'hamant,  
E spaç eus a dri mis, siouas! en eur goall stat,  
Hep lavaret oferen gand an drouc daoulagad.

Alliet oue gant e dud ractal d'en em vouesta  
E chapel ar Palud d'hor mam Santes Anna ;  
En debes m'harruas en deus oferennet :  
Meulet ra vezo Jesus hac e Vam biniguet !

Eus a guichen Pont-Abat eur certen plac'h yaouanc  
Bet tri bloaz gant an derchen, e devoa cals nec'hamant  
Eun navet e deus gret e chapel ar Palud,  
Bet e deus ar yec'het a zirac cals a dud.

Eus a guer Quemper eur potric daouzec vloa  
E spaç a dri devez bet gant an divoada,  
E vam a zisparitas offranç a galon vad  
Da Santes Anna ar Palud, ractal e cess ar goat.

Ur batimant carguet, var e guenta beach,  
Gant an tourmant attaquet, o tremen Bec-ar-Ras,  
Peder heur varnuguent bet entre an daou mour,  
Perissa a sonjent hep gallout en em sicour.

Ar c'habiten, den devot, hac e vartolodet  
Da Santes Anna ar Palud o deus en em voestlet,  
Dre ar graç a Zoue hac e vam-goz Anna,  
Rentet e voant e Brest, disanger ha gant joa.

Evit e drugarecat, o vœu o deveus gret  
Dierc'hen ar Palud ha var gorf o rochet,  
Gant pep a piled-coar, evit rei testeni.  
Eus ho miracl quer caër, Mam ar Vere'hes Mari.

Eun den yaouanc a Vrest, a ugent vloas oajet,  
Pehini, gand ar vrec'h a gollas ar guelet.  
A ras cals a nec'hamant ha d'he vam ha d'he dad,  
Guelet eun sort den yaouanc o coll e zaoulagat.

Ur personnach charitabl o alias timat  
D'e voestla er Palud da Vam ar Verc'hes sacr ;  
Ractal ma o deus laget oferen evità,  
E recevas ar guelet dre c'braç Santes Anna.

En escopty a Leon e parres Ploudaniel,  
E deus grêt Santes Anna ivez ur miracl caër  
En andret ur plac'h yaouanc a so bet attaquet  
Memes e quichen e dor gant ur c'hi arrajet.

Ar plac'h-mân, pa er goelas, a gommanças crial :  
O santes Anna Palud ! hac a invoquas ractal.  
Dre bermission Doue, ar c'hi a lamas timat  
Gant e arrach gant ur men, en abimas a voad.

Just eo c'hoas en hoc'h enor parlant eus ar graçou  
Oc'h eus obtenet d'ar bobl epad e klenvejou.  
An dud oll en o tyer, siouas ! var ar guele !  
Antier hospitalyou gant ar c'hilenvet lous-ze.

Ar re o deus bet bonheur d'en em recommandi  
Deoc'h en o afflictionou, Mam ar Verc'hes Vari,  
A veler o tont bemdez d'o chapel benniguet,  
Da drugarecât Doue da veza bet ar yec'het.

Soudardet, martolodet, ne aller qet nombri,  
An niver a ve guelet bemdez var dro ho ti,  
O trugarecât Doue d'o beza preservet  
E creis an oll combajou, d'an danger exposet.

Cals zo c'hoas a viraclou pere ne hanyân quet  
E deus grêt Santes Anna ar Palud binniguet,  
En andret tud afflijet demeus a bep cartier,  
Bet soulajet er Palud dre graç Mam hor Salver.

Tud cam, tud dall a bouzar e deveus soulajet,  
O rei ar c'hlevout, ar guelet hac an nerz da guerzet,  
Cals bugale languissant o deus santet e c'hraç ;  
An oll a receo yec'het enni bian ha bras.

Ha bagou ha gobiry e deveus preservet,  
Ha tud coueet er mor, pa zint dezi en em voestet,  
O deveus bet recouret o buez disanjer  
Dre graç Santes Anna, guir vam-goz hor Salver.

Pobl eus a Douarnenez, me ho ped, ne vanquit quet,  
Pa en em gueffot en danjer, troët pront ho speret,  
Oc'h Santes Anna ar Palud, pedet a galon vad  
Da zonet d'o preservi, guir Vam ar Verç'hes sacr.

Quement en em gav nec'het gant an affliction,  
En em voestet er Palud gant guir devotion,  
Ha me a ell assuri gant guir fidelite  
E teuffet joaüs d'ar guær, en eur veuli Doue.

E pevar c'horn ar c'hartier approuvet gant an dud  
Ar c'hraçou quen necesser a receiver er Palud,  
E Brest hac e Landerne, e Faou hac e Quemper,  
E santer ar garantez a vam-goz hor Salver.

Conquerne, Enez-Tudy, Penmarc'h ha Pont-Abat,  
E Ponte-Croas, e Goaien e quever testou mat,  
En o afflictionnou o deus-y invoquet,  
An Itron Santes Anna o deus-y exaucet.

Bep meurs epad miz eost ez eus induljançou  
E Santes Anna ar Palud, pardon d'hor pec'hejou,  
An nêp a raï a galon eur govezion vat,  
Ha recevo corf hor Salver gant eur feiz admirabl.

Nep en deus devotion da zont d'ar pardon bras,  
D'ar sul diveza a vis eost emâ ar sourcen a c'hraç ;  
An deiz-ze e deuz choaset hor mam Santes Anna  
Evit beza enoret gant oll dud ar vro-mâ.

O coves, o communia da zevez ar pardon,  
E Santes Anna ar Palud, gant guir devotion  
Eus induljanç plenier gant-ar Pab accordet  
D'an oll gristenien fidel a zeu d'e darempret.

Me o suppli, christenien, douguet a galon vad  
Eur chapelet en enor da Vam ar Verç'hes sacr :  
Deut de lavaret a galon bep meurs, vanquit quet,  
En enor Santes Anna, e viot recompanset.

Deut mnia ma vo possubl d'ar Palud d'e guelet,  
Da visita he chapel, he feunteun binniguet,  
Ha me assur, goulennet ar graçou a guerrot,  
Gant eur galon preparet, certen a recefot.

O Itron Santes Anna, hor Mam hac hon Itron,  
Hon recevet holl brema dindan ho protection,  
Pedit hor Salver Jesus d'hor sicour nos ha de  
Hac en heur eus ar maro da receo hon ene.



CANTIC

*A Veuleudi d'an Itron SANTES ANNA, enoret e  
Parres Plounevez-Porzay, e chapel er  
Palud a dost d'ar mor.*

**Var eun ton nevez.**

Me hoc'h ador, ma Doue, eus a greis ma c'halon,  
Hac a rent d'ho Majeste mil benediction,  
Da veza hon enoret ha carguet a joa,  
Ar graçou accordet d'hor Mam Santes Anna.

O sourcen an oll graçou ha leun a santelez !  
Recevet hor halonou, Mam leun a vadelez,  
Petra bennac ma omp indign eus ho protection,  
Suppliet e Mab divin da accordi deomp pardon.

Itron gant Doue caret, rosen mysterius,  
Ac'hanoc'h eo sortiet Mari, mam da Jesus,  
An hini a oa choaset a bep eternite  
Da garga a joausdet an douar hac an ée.

C'hui eo ar guir patrones eus an dud cureuget,  
Hac ar guir advocades d'an oll intanvezet,  
Tensor an oll vertuziou, exempl ar guerc'heset,  
Hac eur vam leun a graçou da guement den ho ped.

Demeus a greis hon ene ha gant ur guir fisianç  
Ec'h offromp d'ho carantez oll rouanteles Franç ;  
Pidit Doue da accordi d'ar roue guir gristen  
Ar c'hraç da gaout ar victor var e adversourien.


O Itron Santes Anna ! bezit advocades  
Evit or brincet christen hac oll dud ar palæs,  
Ar pennou principala a so ous hon difen,  
Obtenet dezo ar c'hraç da souten al lesen.

Recevet, mam benniguet, ni ho ped a galon vad,  
Dindan ho protection hon Tad Santel ar Pab,  
Ivez ar gardinalet hac an oll esquibien,  
Hac an oll dut a ilis da gresqui al lezen.

Sicouret, mam truezus, hon tud en armeou,  
Astennet ho torn euruz a peuc'h ar c'hombajou,  
Chasseet hon adversourien a bell demeus hor bro,  
Ma vesimp fidel d'ho lesen tre betec ar maro.

Obtenet, me ho suppli, o-mam carantezus !  
D'ar re so en agoni ur maro euruz ;  
Obtenet digant Doue, d'ar groagues so poaniet,  
Badiziant d'ar vugale, ha d'ar vam ar yec het.

Hon tud hac hon oll madou a laqueomp oll gant joa  
Dindan ho protection, Itron Santes Anna,  
Pedit an Dreindet santel da zont d'hor pardonni,  
Ma c'hallimp dre ho sicour mont d'an êe d'he yeuli.



---

Lanhuon, intauvez Ar Goffic, imprimer.